


8N2-3-037

SANTEZ ANNA AR PALUD

KANTIKOU, OFERENN  
GOUSPEROU

CANTIQUES, MESSE  
VÊPRES



FLOCH • MAYENNE

# KANTIKOU

## Santez Anna ar Palud

---

### SANTEZ ANNA AR PALUD

---

TON : *Ni ho salud, steredenn vor.*

DISKAN :

*Meulomp holl gant joa,  
Meulomp santez Anna!*

Santez Anna, mamm d'ar Werc'hez  
Hon eus choazet da batronez,  
Mamm goz Jezuz, Salver ar bed,  
A zo mamm goz d'ar Vretoned.

Meur a gant vloaz 'zo hon Tadou  
O deus bet anezi kelou,  
Hervez ma eo deud d'eomp ar vrud,  
Koz eo burzudou ar Palud.

Dre bec'hejou ar yaouankiz,  
Goude ma voe kollet kêr Is,  
Roue Kerne, hanvet Grallon,  
A voe mantret bras e galon.

Hag evit trei malloz Doue  
Pell-pell dioutañ, diouz bro Gerne,  
E roas, dre wir binijenn,  
Kalz a vadou en aluzenn.

Imprimatur :

P. JONCOUR,  
Vic. gén.

Quimper, le 29 avril 1938.

Eul lodenn d'ezan da veva,  
Ar Palud da zantez Anna,  
Rumengol d'ar Werc'hez Vari,  
Ha Landevenneg da bedi.

E vignon mat sant Gwennole  
A voe karget gant ar Roue  
Da zevel ti santez Anna  
Ha ti an Intron Varia.

Savet 'voe ta dirak ar mor  
Chapel santez Anna Arvor  
Hag ar bobl a bep korn ar vro  
'Zirede da bedi eno.

Abaoue a zo bet bep bloa  
Pardon bras e Santez-Anna,  
A-dreuz an eil kantved d'eben  
Eo deut aman ar bobl kristen.

D'ar zul diweza a viz Eost,  
A zeu tud a bell hag a doñt,  
Breiziz zeu c'hoaz ha déiz ha noz  
Da bardon santez Anna goz.

Paour ha pinvidig d'ar pardon  
A zeu da glask peoc'h ar galon :  
War dachenn zantel ar Palud,  
Santez Anna 'zikour kalz tud :

Tud diwar 'r mêz ha tud eus kêr,  
Tud mac'hagnet ha paotred ter,  
Tud a vor ha tud a vrezel,  
Ha meur a vamm gant he bugel.

Na pebez anaoudegez vat!  
« Deut omp, Mamm, d'ho trugarekât.  
« Dreizoc'h d'hor poaniou omp bet trec'h  
« Santez Anna 'zo hir he brec'h.

« Skuilhit 'ta ho madoberou  
« Warnomp, war hon tiegeziou,  
« War al labourer en dachenn,  
« War hor bagou en-tarziou gwenn.

« Pa renko mont hor bugale  
« Da zoudarded, heul an arme,  
« N'o dilezit ket e pell bro,  
« Gant o feiz ra zeuint en dro.

« Ha ni a vo chomet er gêr  
« Ho pedo gant kalz a breder;  
« Ni' reio, war hon daoulin noaz,  
« Tro hoc'h iliz, bihan ha bras.

« Da zeiz ar pardon 'vimp gwelet  
« Diarc'hen, var gorf hor roched,  
« O heulia, en hon dorn goulou,  
« Proseion ar miraklou.

« Kent kimiada diouz ar Palud  
« Gant karantez ni ho salud,  
« Hag e pep lec'h ni a gano :  
« Er Palud eman Mamm hor bro.

« Na vo mui dero er c'hoad bras,  
« En dachenn na vezo yeot glas,  
« Kent ehano Breiz da gana  
« Meuleudi da zantez Anna. »

Santez Anna e ribl an aod,  
Steredenn aour ar martolod  
Endra vo mor dirak ho ti  
Kendalc'hit krenv feiz Breizidi.

P. AN HELGOUALC'H, *beleg,*  
*ginidik a Blonevez (1852-1902).*

## PEDENN DA ZANTEZ ANNA AR PALUD

TON : *D'hor Mamm Zantez Anna.*

Mamm zantel a Vari  
Salud a greiz kalon  
Enor ha meuleudi  
D'hor Mamm ha d'hon Intron!

DISKAN :

*Intron sanlez Anna,  
Ni ho ped gant joa!  
Mirit tud an Arvor  
War zouar ha war vor!*

Biskoaz n'eus bet klevet  
Klemm eus ho trugarez;  
Ar Palud benniget  
Eo trôn ho madelez.

Dous eo bet d'hon tud koz  
Tanva ho karante,  
Ha ken dous ho pennoz  
A vo d'o bugale.

Selaouit hor pedenn,  
Mamm garet Breiz-Izel  
Selaouit hor goulenn  
Bemdez en ho chapel!

Truez evit ar vamm  
A welit ken-aonik!  
Dalc'hit, dalc'hit dinamm  
Kalon he bugelig!

Truez evit ar paour  
Dirazoc'h daoulinet!  
Truez 'vit ar c'hlanvour,  
O c'honsolit bepred!

Skuilhit er parkeier  
Gliz pinvidik an ne!  
Skoazell d'al labourer  
Skoazell, en han' Doue!

D'an den koz goulennit  
Eun tenzor a furnez,  
D'an den koz goulennit  
Eur fin vat d'e vuhez!

Er mor bras kounnaret,  
Bagig ar pesketour,  
Spontus! a vo lonket  
Ma ne deuit d'he zikour.

En tarziou didruez  
Kerzit, tud an Arvor,  
Anna 'vel ar Werc'hez  
Eo steredenn ar mor!

Bézit ive nerzus,  
Soudarded Breiz-Izel :  
He dorn holl-c'halloudus  
'Vo ganeoc'h er brezel.

Evidomp holl ar bed  
Eo tachenn an emgann :  
O! n'hon dilezit ket,  
P'emaomp e kreiz an tan :

Patronez dous hor Breiz,  
Diwallit mat ho pro;  
Kreskit ennomp ar Feiz,  
Hirio, warc'hoaz, ato!

O Mamm santez Anna,  
Dindan ho tiouaskell  
Pegen kaer eo beva,  
Pegen kaer eo mervell!

---

## KANTIK EN ENOR DA ZANTEZ ANNA

---

TON : *O va ene, kanomp bemdez.*

Saludomp gant devoision  
An Intron santez Anna :  
Lavaromp dezi a galon  
Dirak he aoter aman :

DISKAN :

*Santez Anna, hor Patronez  
Hor sikouril en danjer  
Ha bezit hon alvokadez  
Dirak Jezuz hor Zalver.*

Santez Anna, mamm ar Werc'hez,  
A dra zur 'zo galloudus,  
He merc'h en nenv 'zo Rouanez,  
Gwir vamm d'Hor Zalver Jezuz.

Pep hini da zantez Anna  
Gant fizians en e boaniou,  
A welomp oc'h en em ouestla  
Hag o vont d'he chapeliou.

Ar vamm, evit he bugelig  
D'an Intron santez Anna  
A ra bemdez eur bedennig  
Hag a zesk dezan kana :

Ar zoudard o vont d'an arme  
D'an Intron santez Anna  
En em erbedo, ha neuze  
E kerzo en eur gana :

Ma teu 'n avel vras da c'houeza  
Ar martolod a bedo  
E Batronez santez Anna  
Ha dizoursi e kano :

Al labourer war e dachenn,  
Evit en em ziskuiza,  
Dioc'h è dâl a zec'h ar c'houezenn  
Hag en em ro da gana :

Ar pastour e barr ar menez,  
E zenved en-dro dezan,  
Lies a wech d'e Batronez  
A vez klévet o kana :

O vont d'ar mintin d'e zevez  
Ar micherour a bedo  
Santez Anna, e Batronez  
Ha gant fizians a gano :

E pep korn a vro Breiz-Izel,  
An Intron santez Anna  
He deus eun iliz, eur chapel,  
Deomp holl di da bardona.

Evel hon tud koz, Bretoned,  
Enoromp santez Anna.  
Pe 'z omp klanv, pe 'z omp ankeniet  
Na skuizomp ket o kana :

## KANTIK EN ENOR DA ZANTEZ ANNA

TON : *Laudate Mariam, ou Kalon Douz a Vari.*

Kanomp a vouez uhel  
Mamm goz hon Doue :  
Ni holl e Breiz-Izel  
'Zo he bugale!

Nijit a denn-askell,  
Elez an nenvou,  
Ha gant tud Breiz-Izel  
Savit ho moueziou.

War lein ar menezioù  
Kouls hag en draonienn  
An hegleo d'hor mouezioù  
A respont laouen.

Tarziou ar mor direiz,  
Spont ar martolod,  
A lavar en o c'hiz,  
O vervel en aod :

Kurun bras o krozal,  
Luc'hed o virvi,  
Drouk-avel o strakal,  
A zent holl outi.

Ar c'hlanvour diboaniet  
Gant santez Anna,  
D'ar Palud a zired  
Laouen da gana :

Trec'het diroll ar mor,  
Deut e vag d'ar gêr,  
Martolod an Arvor  
A gan dibreder.

Dizro eus ar brezel  
Dre veur a vuzud,  
Soudarded Breiz-Izel  
A gan er Palud :

Pleget war an dachenn,  
Labourer douar,  
Da zec'ha ho c'houezenn,  
Bemdez c'houi' lavar :

O klask eun tamm bara,  
E-harz toull an nor,  
Kan... paour, santez Anna!  
Te ' gavo digor!

D'an dall e ro 'r gweled,  
Nerz d'an digalon,  
D'ar bouzar ar c'hleved,  
Ar peoc'h d'an anaon.

Kaout a ra d'ar pec'her  
Distro da Zoue.  
Ha dirak e varner  
Truez d'e ene.

Allas! nag a boaniou  
'Gouez warnomp bepred  
Blonset eo kalonou  
Kalz tud-dre ar bed.

O Mamm santez Anna,  
Dindan ho mantell,  
Kuzit ho pugale  
Er Palud santel.

Ha goude hor maro,  
 Diboan, dic'hlac'har,  
 Holl ni en em gavo  
 Da gana er gloar :

DISKAN :

*Meuleudi, meuleudi, d'hor mamm zantez Anna,  
 Meuleudi ha bennoz er Pâlad, en deiz-ma.*

EIL DISKAN :

*Enor, bennoz da zantez Anna,  
 Meulomp, meulomp ar Vamm ar wella.*

## HANO SANTEZ ANNA

TON : *Pegen kaer ez eo mamm Jezuz.*

DISKAN :

*Santez Anna, hano meulet,  
 E Breiz-Izel kemerit karet,  
 Hano dous, hano kaer meurbet!*

Pe ven er boan hag en anken,  
 Pe ven yac'h, eurus ha laouen,  
 Santez Anna! eo va fedenn.

Kousket out koant, bugel bihan,  
 War da vuzellou e welan  
 Eur mousc'hoarzig 'vel heol ennan.

Bemdez, bemnoz, harz va c'hayell,  
 Santez Anna 'zigas eun el  
 D'astenn warnon e ziuaskell.

Kriz e 'r brezel, tennou a zo  
 Ken na very an tan tro-war-dro,  
 Soudard Breiz, tost eo ar maro!

Kentoc'h ar maro 'get an tec'h!  
 Santez Anna 'zo hir he brec'h!  
 Dreizi en emgann me 'vo trec'h.

Bihan da vag ha bras ar mor,  
 Dinerz da stur, dispeg an eor;  
 Krena 'dlêz, martolod Arvor!

Gwelloc'h 'get goueliou ha sturiou,  
 Santez Anna, dre an tarziou,  
 A gas d'eomp d'ar gêr hor bagou.

Pe gant da falc'h, pe gant da varr  
 Pe en ero krog en alar,  
 Start eo dit, labourer douar.

Pa vez re skuizet va divrec'h,  
 Santez Anna 'glaskan d'an nec'h,  
 Etre hon daou 'lakan ar bec'h.

Pa deu ken lies an dud fall  
 D'ho kailhara ha d'ho tamall,  
 Beleien Breiz, piou ho tiwall?

Santez Anna hon difenno,  
 Ganti eo deut ar Feiz er vro,  
 Gant he gras ni he c'hendalc'ho.

Hep ti na tan, arc'hant na den,  
 Pa c'houlennet an aluzenn,  
 Paour, pehini eo da bedenn?

Pa'z an da glask va zamm bara,  
 En eur bedi santez Anna,  
 N'welan morse dor o sarra.

O tiwall da zenvedigou,  
 Mesaer, war lein ar menezioù,  
 Ouz petra 'zellez en nenvou?

Ouz santez Anna, mamm hor bro,  
 Sent koz Breiz-ganti 'zo eno :  
 Na me garfe beza ganto!

War e wele, pe 'n e gavell,  
 Pa welit gwall-glanv ho pugel,  
 Petra ' rit, mammou Breiz-Izel?

War hon daoulin ni 'n em laka  
 D'her gouestla da zantez Anna,  
 Sur omp ' zeuio da barea.

Gant ho penn-baz poan o kerzet,  
 Gwenn-kann ho pieo, c'houi daoubleget,  
 Tad koz, pe seurt pedenn peus grêt?

Tridal gant dudi ha bennoz :  
 Gant ar c'hleier a skiltr d'an noz  
 Va mamm am galv d'ar baradoz.

Aour hag arc'hant, gened, mor bras,  
 Bolz steredennet an oabl glas,  
 Santez Anna 'zo kaeroc'h c'hoaz!

En oabl, er mor, war an douar,  
 A vouez uhel Breiz hel lavar :  
 Santez Anna a zo hep par. »

## A SAINTE ANNE

### REFRAIN :

*O Sainte Anne, ô Mère chérie,  
 Garde au cœur des Bretons la foi des anciens jours.  
 Entends du haut du ciel le cri de la patrie,  
 Catholique et Breton toujours!*

Des Bretons puissante patronne,  
 Nous te saluons à genoux,  
 Comme à nos pères douce et bonne,  
 Veille toujours, veille sur nous.

Car tu le sais, au temps antique,  
 Ils se sont à toi consacrés,  
 Et les enfants de l'Armorique,  
 Par toi furent tous adoptés.

Et depuis, dans notre patrie,  
 O Reine du pays breton,  
 Ou peine ou bonheur de la vie,  
 A tout se mêla ton saint nom.

A chaque âge de notre histoire  
 Ce fut l'héritage transmis;  
 Aux Bretons foi, vigueur et gloire,  
 Car Sainte Anne les a bénis.

Mais voici l'heure de tristesse,  
 Pour notre foi nous combattons,  
 Ah! fais que nous restions sans cesse  
 Et catholiques et Bretons.

Si pour garder notre foi pure,  
 Il nous faut lutter et souffrir,  
 O Mère, avant toute souillure,  
 Fais que nous sachions mourir.

La Bretagne est toujours fidèle  
 A l'Eglise, au Pontife-Roi.  
 Elle est à toi, veille sur Elle,  
 Garde-lui son Christ et sa Foi!

### KANTIK DA ZANTEZ ANNA AR PALUD

Evit an deiz ma'eo bet kurunet

TON : *Pange solemnes.*

Patronez Breiziz, Santez Anna garet,  
Hiriö Breiz-Izel aman 'zo diredet  
Da rei testeni deoc'h euz he c'harantez,  
C'houi, mamm ar Werc'hez.

DISKAN :

*Ra vo kurunet Santez Anna 'r Palud,  
He deus grêt aman ken lies a vürzud  
'Vit an dud fidel o deus grêt o fedenn  
Dirak he skeudenn.*

Savomp hor moueziou en deiz-man ma klevor  
Leon, Kerne, Treger, ar Menez, an Arvor,  
Breiz en hoc'h enor, Breiz a-bez o kana,  
O Santez Anna:

O kaera devez, gwelet ar gurunenn  
A-berz an iliz, laket war ho skeudenn!  
Santez ar Palud, Mamm-goz ar Vretoned,  
Ra viot meulet!

Pa ' zaemp d'ho pardon betek Iliz Gwened  
Ho kavemp ken kaer gant ho penn kurunet  
Ma fell d'eomp ive, Kerneviz, ho kwiska,  
Mamm Santez Anna.

Bennoz d'hon Eskob, bennoz d'an Tad Santel  
Evit an enor o deus grêt d'ho chapel,  
N'eus den er vro-man na drido e galon  
M'en deus gwad breton.

Ni hoc'h anavez, Intron Santez Anna :  
Aman hon tadou ' zeue da zaoulina; \*

Gwelit o tostât breman o bugale  
War vor, war vale.

O Mamm, ho kalloud a zo bras en nenvou :  
Da biou e kasfemp gwelloc'h hor pedennou?  
Rag ho mab-bihan eo an Holl-C'halloudus,  
Hor Zalver Jezuz.

An Tad-Eternel en deus ho tibabet  
Da rei ar vuhez d'he Verc'h maüa karet  
Hag en ho kozni e c'hanit eur bugel,  
Ar Werc'hez Santel.

Pebez levez, gwelet en he c'havell  
Ar c'hrouadurig purroc'h eget eun êl.  
Ar Werc'hez skedus evel eur steredenn,  
Ar Werelaouenn.

Mari a zo deut, dre eur burzud dispar  
A c'halloud Doue, dibec'h war an douar;  
Hag, o chom gwerc'hez eo galvet da c'henel  
Mab an Eternel.

War Galon Jezuz, piou, goude ar Werc'hez  
A c'hellfe beza, kouls ha c'houi, Rouanez?  
Deoc'h hor c'hantikou, deoc'h hor meuleidiou  
Hag hor pedennou.

O Santez Anna, hor bro eo hoc'h hini  
Mirit na gouezo droulans Doue warri.  
An ifern, siouaz! a ziroll e gounnar  
War hor c'horn-douar.

Ar fals kredennou bemdez en em astenn :  
Harpit er vro-man bepred ar feiz kristen  
Holl, bras ha bihan, skoazellit ac'hanomp,  
Pedit evidomp.

B. COZANET, *Beleg.*

# GWERZ SANTEZ ANNA AR PALUD

(Kurunet d'an 31 a viz Eost 1913)

TON : *C'houi hag a zo Kristenien.*

## I

Diredet omp gant dudi,  
 Mamm-goz Salver ar bed,  
 D'ho kwelet ha d'ho pedi  
 D'ar Palud benniget,  
 Hor c'halon drant ha laouen  
 Ennomp 'zeu da dridal,  
 Pa welomp ar gurunenn  
 O lintra war-ho tal.

DISKAN :

*Santez Anna ar Palud,  
 Hor mamm hag hon intron,  
 Holl hirio ni ho salud  
 Hag ho ped a galon,  
 Mil bennoz d'an deiz santel.  
 M'ho kweljomp a nevez  
 Kurunet e Breiz-Izel,  
 E Palud Plonevez.*

## II

Goude ma voe sebeliet  
 E kreiz islonk ar mor,  
 Kêr Is, ar gêr milliget,  
 Perlezenn an Arvor,  
 Grallon 'roas Rumengol  
 D'an Intron-Varia,  
 Hag ar Palud en digoll  
 D'hor mamm Zantez Anna.

## III

Breiz-Izel eo ho leve  
 Ha bepred ho karo,  
 Ni vezo ho pugale  
 Betek pred ar maro;  
 En hor c'halon asamblez  
 'Vo moulllet an dounna  
 Gant hano dous ar Werc'hez,  
 Hano Santez Anna.

## IV

Kent c'houi 'oa hor patronez,  
 Hor mamm hag hon intron  
 Breman oc'h hor Rouanez  
 Er Palud 'man ho tron,  
 Ha goude hini Gweñed  
 Ken brudet e pell bro,  
 Skedusoc'h ne vo gwelet  
 E Breiz na tro-war-dro.

## V

Savet e kreiz an tevenn  
 Na kaër eo ho chapel!  
 Ar pardoner 'zo laouen  
 Pa he gwel eus a bell,  
 Kelc'h et gant ar menezioù  
 Ha mor Douarnenez,  
 Dindan bolz aour an nenvou  
 N'he deus ket he farez.

## VI

Aman dirak ho skeudenn  
 Gwechall hon tadou koz,  
 A gare dont da c'houlenn  
 Ho skoazell, ho pennoz;

War o lerc'h o bugale  
Dre o roudou santel  
A gendalc'ho da vale  
Ha deoc'h a vo fidel.

VII

Ar zonj eus ar burzudou  
C'hoarvezet er Palud,  
A zo dre ar c'hantvejou  
Chomet beo 'touez an dud,  
Burzudou hag a ziskouez  
Ez eo ho kalon tomm,  
Ho peus bet atô truez  
Ouz an den en ezomm.

VIII

Aman en deus askavet  
Ar c'hlanvour ar pare,  
An den dall en deus kavet  
Ar gweled adarre,  
Hag eur werz koz a lavar  
Ho peus, Santez Anna,  
Betek chas klanv e kounnar  
Lakêt da argila.

IX

Ha piou ' c'hello lavaret  
Pegement a c'hrasou  
A zo dreizoc'h, mamm garet,  
Redet war an eneou,  
Abaou an deiz santel  
M'o deus deoc'h hon tadou  
Savet aman eur chapel,  
E bro goz ar Porzou?

X

Savet eo a wel d'an ôd  
'Vit diwall an Arvor,  
C'houi eo nerz ar martolod  
E eil steredenn vor;  
Bemdez arôk kimiada  
Eus ar gêr hag e dud,  
E ray eur zell diweza  
Etrezek ar Palud.

XI

Pa welo er Gornaoueg  
Ar barr du o sevel,  
Pa verro kreiz ar c'herreg  
Ar mor gant an avel,  
Ar martolod reuzeudik  
E lec'h chom da grena,  
A raio eur bedennig  
D'e Vamm Zantez Anna.

XII

« Va zikourit, Mamm dener,  
« Da dremen beg ar Raz,  
« Va bagig a zo dister  
« Hag ar mor a zo bras;  
« Diarc'hen ha diskabell,  
« Intron Santez Anna,  
« Me ' raio tro ho-chapel  
« Pa 'z in da bardona. »

XIII

Kendalc'hit, o mamm zantel,  
Da ziwall ho pro Vreiz,  
Kuzit, e pleg ho mantell  
Ho tenved ouz ar bleiz;

Ra jomo ar Feiz kristen  
 Bepred 'én hor c'halon,  
 Sounn ha start 'vel an dervenn,  
 Enor hor c'hoajou don.

XIV

Niver an dud dizoue  
 A gresk atô e Breiz,  
 Brezel a rêr da Zoue,  
 D'e Iliz ha d'hor Feiz,  
 Hor zikourit en enkrez,  
 Ho prec'h a zo nerzuz,  
 Dre ma 'z oc'h mamm d'ar Werc'hez  
 Ha mamm-goz da Jezuz.

J. HORELLOU, *beleg,*  
*ginidik a Blonevez (1864-1923.)*

LITANIOU SANTEZ ANNA

Aotrou Doue, ho pet truez ouzomp.  
 Jezuz-Krist, ho pet truez ouzomp.  
 Aotrou Doue, ho pet truez ouzomp.  
 Jezuz-Krist, hor selaouit.  
 Jezuz-Krist, hor selaouit.  
 Tad eus an nenv a zo Doue, ho pet truez ouzomp.  
 Mab, Redemptor ar bed, a zo Doue, ho pet truez ouzomp.  
 Spered-Santel, a zo Doue, ho pet truez ouzomp.  
 Santez Anna, pedit évidomp.  
 Santez Anna, Mamm goz Jezuz-Krist,  
 Santez Anna, Mamm Mari bepred Gwerc'hez,

Santez Anna, pried Joachim,  
 Santez Anna, mamm-gaer Joseph,  
 Santez Anna, arc'h Noe,  
 Santez Anna, menez Oreb,  
 Santez Anna, gwrizienn Jesse,  
 Santez Anna, gwezenn frouezus,  
 Santez Anna, diskennet a lignez ar rouaned,  
 Santez Anna, levenez an Elez,  
 Santez Anna, merc'h ar Batriarched,  
 Santez Anna, mouez ar Brofeted,  
 Santez Anna, gloar ar Zent,  
 Santez Anna, gloar ar Veleien,  
 Santez Anna, koabrenn leun a c'hliz,  
 Santez Anna, koabrenn lugernus,  
 Santez Anna, lestr leun a c'hras,  
 Santez Anna, melezeur a zentidigez,  
 Santez Anna, melezeur a basianted,  
 Santez Anna, melezeur a drugarez,  
 Santez Anna, melezeur a zevosion,  
 Santez Anna, skoazell an Iliz,  
 Santez Anna, refuch ar bec'herien,  
 Santez Anna, skouër ar gristenien,  
 Santez Anna, a ro ar frankiz d'ar brizonierien,  
 Santez Anna, konsolasion an dud dimezet,  
 Santez Anna, mamm an intañvezed,  
 Santez Anna, gouarnerez ar gwerc'hezed,  
 Santez Anna, porz ar vartoloded,  
 Santez Anna, hent ar veachourien,  
 Santez Anna, lóuzou ar re glanv,  
 Santez Anna, yec'hed an dud dinerz,  
 Santez Anna, sklerijenn ar re zall,  
 Santez Anna, teod ar re vud,  
 Santez Anna, skouarn ar re vouzar,  
 Santez Anna, sikour kement hini a zeu d'en em  
 erbedi ouzoc'h, pedit évidomp.

Aotrou Doue, ho pet truez ouzomp.  
Jezuz-Krist, ho pet truez ouzomp.

V. Doue en deus karet santez Anna.  
R. Hag en deus karet ive he gened.

PEDENN. — Me ho salud, leun a c'hras, an Aotrou Doue zo ganeoc'h, ra vezo ive ho kras ganin-me! Benniget oc'h dreist an holl gwraez, ha benniget ra vezo santez Anna, ho Mamm, he deus ho kanet dinamm ha dibec'h, o Gwerc'hez Vari, ho peus laket er bed Jezuz-Krist, Mab an Doue heo. Evelse bezet grêt.

(Kant dervez induljans bep gwech, evit ar bedenn-ma. Induljans plenier d'ar 26 a viz Gouere, war bouez kovez ha sakramanti, evit nep en defe he lavaret dek gwech er miz, d'an nebeuta.)

---

## OFERENN SANTEZ ANNA

---

Gaudeamus omnes in Domino, diem festum celebrantes sub honore beatæ Annæ : de cuius solemnitate gaudent Angeli, et collaudant Filium Dei. — *Ps.* Eructavit cor meum verbum bonum : dico ego opera mea regi. Gloria Patri.

Gloria in excelsis Deo — Et in terra pax hominibus bonæ voluntatis — Laudamus te — Benedicimus te — Adoramus te — Glorificamus te — Gratias agimus tibi propter magnam gloriam tuam — Domine Deus, Rex cœlestis, Deus Pater

omnipotens — Domine, Fili unigenite, Jesu Christe — Domine Deus, Agnus Dei, Filius Patris — Qui tollis peccata mundi, miserere nobis — Qui tollis peccata mundi, suscipe deprecationem nostram — Qui sedes ad dexteram Patris, miserere nobis — Quoniam tu solus sanctus — Tu solus Dominus — Tu solus Altissimus, Jesu Christe — Cum Sancto Spiritu, in gloria Dei Patris. Amen.

Credo in unum Deum — Patrem omnipotentem, factorem cœli et terræ, visibilium omnium, et invisibilium — Et in unum Dominum Jesum Christum, Filium Dei unigenitum — Et ex Patre natum ante omnia sæcula — Deum de Deo, lumen de lumine, Deum verum de Deo vero — Genitum, non factum; consubstantialem Patri : per quem omnia facta sunt — Qui propter nos homines et propter nostram salutem descendit de cœlis — Et incarnatus est de Spiritu Sancto ex Maria Virgine : Et homo factus est — Crucifixus etiam pro nobis : sub Pontio Pilato passus, et sepultus est — Et resurrexit tertia die, secundum Scripturas — Et ascendit in cælum : sedet ad dexteram Patris — Et iterum venturus est cum gloria, judicare vivos et mortuos : cuius regni non erit finis — Et in Spiritum Sanctum Dominum, et vivificantem : qui ex Patre Filioque procedit — Qui cum Patre et Filio simul adoratur, et conglorificatur : qui locutus est per Prophetas — Et unam sanctam catholicam et apostolicam Ecclesiam — Confiteor unam baptismam in remissionem peccatorum — Et expecto resurrectionem mortuorum — Et vitam venturi sæculi — Amen.

ANGELUS

Ni ho salud gant karantez,  
Rouanez ar Zent hag an Elez  
C'houi a zo benniget,

O pia,  
Hag a c' hrasou karget  
Ave Maria!

Ra vezo-benniget Jezuz;  
Ar frouez eus ho korf evurus  
Kanomp gant an Elez,

O pia,  
E veuleudi bemdez,  
Ave Maria!

Ni ho ped, Mari, gwerc'hez c'hlan,  
Pa vezimp war hon tremenvan,  
Da c'houlenni ouz Jezuz,

O pia,  
Deomp eur maro eürus,  
Ave Maria!

---

GOUSPEROU SANTEZ ANNA

I. — Laudemus Annam gloriosam in generatione sua, quia benedictionem dedit illi Dominus.

DIXIT Dominus Domino meo; \* Sede a dextris meis :

— Donec ponam inimicos tuos, \* scabellum pedum tuorum.

Virgam virtutis tuæ emittet Dominus ex Sion : \* dominare in medio inimicorum tuorum.

— Tecum principium in die virtutis tuæ in

splendoribus Sanctorum : \* ex utero ante luciferum genui te.

Juravit Dominus, et non pœnitebit eum : \* Tu es sacerdos in æternum secundum ordinem Melchisedech.

— Dominus a dextris tuis, \* confregit in die iræ suæ reges.

Judicabit in nationibus, implebit ruinas : \* conquassabit capita in terra multorum.

— De torrente in via bibet : \* propterea exaltabit caput.

Gloria. — Sicut erat.

\* \*

II. — Anna, filia Regum, conjux Joachim, Mater almæ Virginis, benedictus fructus ventris tui.

LAUDATE, pueri, Dominum; \* laudate nomen Domini.

— Sit nomen Domini benedictum, \* ex hoc nunc, et usque in sæculum.

A solis ortu usque ad occasum, \* laudabile nomen Domini.

— Excelsus super omnes gentes Dominus, \* et super cœlos gloria ejus.

Quis sicut Dominus Deus noster, qui in altis habitat, \* et humilia respicit in cœlo et in terra?

— Suscitans a terra inopem, \* et de stercore erigens pauperem :

Ut collocet eum cum principibus, \* cum principibus populi sui.

— Qui habitare facit sterilem in domo, \* matrem filiorum lætantem.

Gloria Patri. — Sicut erat...

\* \*

III. — Gaude, Mater magnæ Prolis, ex te enim processit rutilans stella summi Solis.

LÆTATUS sum in his quæ dicta sunt mihi: \* in domum Domini ibimus.

— Stantes erant pedes nostri, \* in atriis tuis, Jerusalem.

Jerusalem, quæ ædificatur ut civitas, \* cujus participatio ejus in idipsum.

— Illuc enim ascenderunt tribus, tribus Domini: \* testimonium Israel, ad confitendum nomini Domini.

Quia illic sederunt sedes in iudicio, \* sedes super domum David.

— Rogate quæ ad pacem sunt Jerusalem, \* et abundantia diligentibus te.

Fiat pax in virtute tua, \* et abundantia in turribus tuis.

— Propter fratres meos et proximos meos, \* loquebar pacem de te.

Propter domum Domini Dei nostri, \* — quæ sivi bona tibi.

Gloria. — Sicut erat.

\* \*

IV. — Inclyta stirps Jesse virgam produxit amœnam, ex qua processit flos miro plenus odore.

NISI Dominus ædificaverit domum, \* in vanum laboraverunt qui ædificant eam.

— Nisi Dominus custodierit civitatem, \* frustra vigilat qui custodit eam.

Vanum est vobis ante lucem surgere: \* surgite

postquam sederitis, qui manducatis panem doloris.

— Cum dederit dilectis suis somnum: \* ecce hæreditas Domini, filii; merces, fructus ventris.

Sicut sagittæ in manu potentis, \* ita filii excusorum.

— Beatus vir qui implevit desiderium suum ex ipsis; \* non confundetur cum loquetur inimicis suis in porta.

Gloria. — Sicut erat.

\* \*

V. — Ecce tu felix es Anna sancta, ecce tu felix es, Genitrix matris Dei.

LAUDA, Jerusalem, Dominum: \* lauda Deum tuum, Sion.

— Quoniam confortavit seras portarum tuarum; \* benedixit filiis tuis in te.

Qui posuit fines tuos pacem, \* et adipe frumenti satiat te:

— Qui emittit eloquium suum terræ, \* velociter currit sermo ejus:

Qui dat nivem sicut lanam: \* nebulam sicut cinerem spargit.

— Mittit crystallum suam sicut bucellas: \* ante faciem frigoris ejus quis sustinebit?

Emittet verbum suum, et liquefaciet ea: \* flabit spiritus ejus, et fluent aquæ.

— Qui annuntiat verbum suum Jacob, \* justitias et judicia sua Israel.

Non fecit taliter omni nationi, \* et judicia sua non manifestavit eis.

Gloria. — Sicut erat.

\* \* \*

- I. — Fœcunda radix Isai,  
Florem novellum germinat,  
Annæ micantem nomine  
Matrem futuram Virginis.
- II. — Hanc rite conjux accipit  
Davidis invicti genus,  
Optatus at moras facit  
Fructus sacrati fœderis.
- III. — Tandem beato munere  
Grandæva mater filiam,  
Quam lætus orbis invocat  
Partu sereno protulit.
- IV. — O Britonum lux inclyta,  
Priscæ memor clementiæ  
Serva fidelem Patriam  
Plebisque vota suscipe.
- V. — Sit laus Patri sit Filio,  
Tibique, Sancte Spiritus,  
Annam pie colentibus  
Confer perennem gratiam. Amen.

\* \* \*

V. Ora pro nobis, beata Anna,  
R. Quæ Matrem Dei Immaculatam peperisti.

\* \* \*

O Mater Patriæ, Anna potentissima, Britonum  
tuorum salus esto; serva fidem, mores corrobora,  
tribue pacem sancta intercessione.

\* \* \*

Magnificat anima mea Dominum.  
Et exsultavit spiritus meus : \* in Deo salutari  
meo.  
Quia respexit humilitatem ancillæ suæ : \* ecce

enim ex hoc beatam me dicent omnes genera-  
tiones.

Quia fecit mihi magna qui potens est : \* et  
sanctum nomen ejus.

Et misericordia ejus a progenie in progenies,\*  
timentibus eum.

Fecit potentiam in brachio suo : \* dispersit su-  
perbos mente cordis sui.

Deposuit potentes de sede, \* et exaltavit hu-  
miles.

Esurientes implevit bonis : \* et divites dimisit  
inanes.

Suscepit Israel puerum suum, \* recordatus mise-  
ricordiæ suæ.

Sicut locutus est ad patres nostros, \* Abraham,  
et semini ejus in sæcula.

Gloria Patri. — Sicut erat...

### EVIT BENNOZ AR ZAKRAMANT

Adoromp holl, e Sakramant an Aoter  
Doue kuzet, Jezuz hor Mestr, hor Zalver.  
Sperejou evurus, Elez ar Baradoz,  
Gant karantez a dan meulit-hen deiz ha noz.

Gwir Vab Doue, en em c'hrêt den d'hor prena,  
En osti sakr oc'h kuzet 'vit hor maga;  
Plijet gameoc'h skuilha, eus ho tron an aoter,  
Warnomp daoulinet aman, ho pennoz, va Zalver,

Enor ha gloar ha karantez da Zoue :  
D'an Tad, d'ar Mab, d'ar spered Santel ive;  
Ra vezo e pep lec'h an holl grouadurien  
Añetus d'e veuli hirio ha da viken.

Monstra te esse matrem,  
Sumat per te preces  
Qui, pro nobis natus,  
Tulit esse tuus.

---

Oremus pro Pontifice nostro — Dominus con-  
servet eum, et vivificet eum, et beatum faciat  
eum in terra, et non tradat eum in animam inimi-  
corum ejus.

---

Tantum ergo Sacramentum,  
Veneremur cernui :  
Et antiquum documentum  
Novo cedat ritui :  
Præstet fides supplementum  
Sensuum defectui.

Genitori, Genitoque  
Laus et jubilatio :  
Salus, honor, virtus quoque  
Sit et benedictio :  
Procedenti ab utroque  
Compar sit laudatio  
Amen.

---

Meuleudi da Zoue!  
Meuleudi d'e Hano santel!  
Meuleudi da Jezuz Krist, gwir Doue ha gwir den!  
Meuleudi da Hano santel Jezuz!  
Meuleudi d'e Galon Zakr!  
Meuleudi da Jezuz e sakramant an Aoter!  
Meuleudi da Vamm Doue, ar Werc'hez glorius  
[Vari!]

Meuleudi da Vari, konsevet hep pec'hed!  
Meuleudi da Hano Mari, Mamm ha Gwerc'hez!  
Meuleudi da zant Joseph, Pried glan ar Werc'hez  
[Vari!  
Meuleudi da Zantez Anna, patronez Breiz-Vihan!  
Meuleudi da Zoue dre Elez ha Sent ar Baradoz

D'hor Mamm Zantez Anna,  
D'an Itron Varia,  
D'hor Zalver benniget  
Ni 'vo fidel hepred.

---

Da Feiz hon Tadou Koz, ni pôted (1) Breiz-Izel,  
Ni 'zalc'ho mat ato.  
'Vit Feiz hon Tadou koz hag endro d'he banniel  
Ni holl en em stardo.  
Feiz karet hon Tadou, morse ni n'ho nac'ho,  
Kentoc'h ni a varvo (3 gwech).

(1) Ar merc'hed a gano : « Ni merc'hed... »